

## KIS-450 – Br. **daz-**, **das-**

(11 03 94 – IK da GE)

Nevez zo e oamp o'n em c'houlenn peseurt kemmadurioù a veze graet goude ar rakger **daz-**, **das-**. Kavout a ra da Vartial [MENARD] e oa bet embannet gant SADED ur renabl eus ar c'hemmadurioù degaset gant ar rakger-mañ-rakger er gerioù nevezsavet. Met n'en deus ket soñj pelec'h. Ha tu a vefe deoc'h lavaret deomp pelec'h e c'hallfemp kavout hevelep renabl ?

(18 03 94 – GE da IK)

Ar roll nemetañ eus ar rakgerioù gant ar c'hemmadurioù er yezh arnevez zo bet embannet gant Goulven PENNAOD war *Ar Stourmer* (pp. 134 hh.). Ar roll-se avat zo a) diglok a-fet niver ar rakgerioù, b) diglok kaer evit a sell ar c'hemmadurioù, c) oc'h erbediñ kemmadurioù disheñvel a-wechoù diouzh ar re arveret.

Dav eo lavarout e kemplege SADED ha d'e heul *Emsav* ha dre vras skrivagnerion *Preder* d'ar reolennoù diazezet gant Roparz HEMON. Ne voe kemeret disentezioù nemet evit an degouezhioù na oant ket bet studiet gant Roparz HEMON.

Evit a sell **az-**, **as-** (< \**ad-*), **daz-**, **daz-** (< \**do-ad-*) ne welan tra gwell eget ober un trosell war al lizherenneg, o reiñ skouerioù evit an eil ha/pe egile eus an daou rakger hag ar c'hemmadur d'o heul pa vez :

<b>A</b>	<b>azanaout</b>	<b>E</b>	<b>dazeilañ</b>
<b>B</b>	<b>azblev, dazbroañ</b>	<b>F</b>	<b>azfaoutañ, dasfaoutañ</b> <sup>(2)</sup>
<b>CH</b>	<b>Ø</b> (moarvat <b>as-</b> , <b>das-</b> )	<b>G</b>	<b>azgervel, dazgleboriñ</b>
<b>C'H</b>	<b>dazc'hoari</b>	<b>Gw</b>	<b>azgwel, dazgwered</b>
<b>D</b>	<b>azdodiñ</b> <sup>(1)</sup>	<b>H</b>	<b>azhenter, dasheñvelaat</b> <sup>(3)</sup>
<b>I</b>	<b>dazizad</b>	<b>R</b>	<b>azrann, dazrummañ</b>
<b>J</b>	<b>Ø</b> (moarvat <b>az-</b> , <b>daz-</b> )	<b>S</b>	<b>assac'h, dassav</b>

<b>K</b>	<b>askil, daskemm</b>	<b>T</b>	<b>astaol, dastreiñ</b>
<b>L</b>	<b>azlamm, dazlenn</b>	<b>U</b>	<b>dazuc'hat</b>
<b>M</b>	<b>azverk, dazverañ</b> <sup>(4)</sup>	<b>V</b>	<b>Ø</b> (moarvat <b>az-</b> , <b>daz-</b> )
<b>N</b>	<b>azneveziñ, dazneuziat</b>	<b>W</b>	<b>Ø</b> (moarvat <b>az-</b> , <b>daz-</b> )
<b>O</b>	<b>dazober</b>	<b>Y</b>	<b>Ø</b> (moarvat <b>az-</b> , <b>daz-</b> )
<b>P</b>	<b>aspadenn, dasparzh</b>	<b>Z</b>	<b>Ø</b> (moarvat <b>az-</b> , <b>daz-</b> )

Evel a weler ne vez o c'hoarvezout nemet ar c'hemmadur M/V.

<sup>(1)</sup> Sl. ivez KIS-329 – Br. **ad-**, **az-** + **d-**, **t-**, **h-**, La-08, pp. 299-302.

<sup>(2)</sup> Roparz HEMON a ro : **azfoar**, **azfoenn**, **azfritañ**. D'e heul, skrivagnerion *Preder* o deus kendalc'het d'ober gant **az-+f-**, hogen gant **das-+f-**. Tuet eur da zigej ur reolenn hollek a grenner evel henn : **-z-** + kensonenn hevouezh pe vogalenn, **-s-** + kensonenn divouezh. Mar degemerfed ar reolenn-se e rankfed ober gant **as-+f-**. Koulskoude ez eus ur reolenn all, pouezusoc'h : gwell asantiñ d'un nemedenn eget strafuilhañ ar stummoù degemeret. Alese da zibab etre (a) **az-+f-**, **das-+f-** ha (b) **as-+f-**, **das-+f-** ez afen-me hervez an diskoulm (a). Prest on avat d'e zilezel mar bez kavet gwell, eeunoc'h, ober gant an diskoulm (b). Karout a rafen gouzout buan a-walc'h petra a ziviz tud *Geriadur An Here*, rak e'm *Geriadur ar Stlenneg* e'm eus d'ober gant an termen *das/zfaoutañ*. [GE - 01 07 96. Direspont oa chomet va aters ouzh tud ar *Geriadur* ha kendalc'het 'm eus d'ober hervez an diskoulm (a).]

<sup>(3)</sup> Kavout a reomp amañ ur gudenn heñvel ouzh an hini ma pleustromp en notenn diaraok : diskoulm unvan a vo da reiñ d'an div.

<sup>(4)</sup> Notomp ar skrivad **asvan** bet dalc'het gant Roparz HEMON ha skrivagnerion *Preder* hag *Emsav* d'e heul daoust ma tever ar ger diwar **az-+man** hogos sur. Gwell e kave Roparz HEMON na gemmañ skrivadur an termenoù krennvrezhonek pe deodyezhel pa na veze ket peurasur war o orin (sl. ivez **esgoar**, dalc'het er skrivadur krennvrezhonek daoust ma'z eo anat e teu eus **ez-+gwar**).